

taBoulis

Kelaouenn ar skolioù

Emañ ar gomz gant ar skolidi

Miz C'hwevrer 2011 • Niv. 19

A-hed ar stêr



**Penn Leger
Pontoù Leger
Koad Leger
Trañ Leger
Beg Leger
Leger, un hent bev
Betek ar mor.*

** Haiku Fañch Peru*



**Penn Leger
Burzhud
A-dreuz an taouarc'h
Rous-du
E eienenn
Dour strink.*

Al Leger a zo ur stêr eus Aodoù-an-Arvor. E Boulvriag, en ur gêriadenn vihan war ar maez anvet Penn Leger emañ eienenn al Leger. Treuziñ a ra bro an Argoad : koadier Koad an Noz ha Koad an Nae.

Meur a adstêr a zo, an hini vrasañ eo ar Gwig hag en em gav gant al Leger e Benac'h. 59 km eo hirder ar stêr eus an eienenn betek kêr vras Lannuon.

Etre Lannuon hag ar mor e Belleger ez eus un doare aber dre ma sav dour ar mor betek Lannuon pa vez reverzhi. 8 km a zo etre Lannuon ha Belleger. Ur stêr war-dro 70 km dezhi eo neuze al Leger.

Hor skol a zo savet nepell eus al Leger e Logivi-Lannuon. Studiet hon eus petra eo ur stêr ha meur a wezh hon eus degemeret Fañch Peru. Eñ zo barrek war an haiku, barzhonegoù bihan-tre. Desket en doa deomp penaos ober ar rimadelloù bihan-se.



**Roc'hell-ar-Big
Roc'hell-ar-Vran
Etre an daou c'hedour
Al Leger a richan.*

► Kember ar Gwig hag al Leger e Benac'h.

Haiku al Leger

Bez' eo an haiku ar barzhoneg bihanañ a zo er bed, a orin eus Bro-Japan. Ur reolenn hag ul lusk resis zo gantañ, teir gwerzenn zo e-barzh un haiku :


- 5 silabenn er werzenn gentañ,
- 7 silabenn en eil gwerzenn
- ha 5 silabenn c'hoazh en trede gwerzenn.

Savet hon eus meur a haiku diwar-benn ar stêr Leger, met poan hon eus bet o heuliañ ar reolenn bep tro.

Gwelet 'm eus ur skrev
'Barzh e veg ur c'hlizigenn
Kavet en dour sall.



Evn Sant-Nikolaz
Tapout 'ra fubu 'n e veg
Gwer, glas, gwenn, melen.



Amañ, du-mañ, gwelet 'ran
Labous glas Sant-Nikolaz
O klask pesketa.



E foñs ar stêr
An eog 'c'h a da goach
Gant aon deus ar pesketaer.




Ur vorvran vihan
He deus gwelet un dluzhenn
O neuial buan.



Pesked glas arc'hant
Luc'hañ a rit el Leger
Me 'blij din sellet.



War an hent-alaj
'z eus ur gazeg o sachañ
War kordenn ar bigi.



Ur glazard hag ar big
Ar sourd a ev kalz a zour
Pesketa a ra ar big.



Dourgi pe ki-dour
An dourgi gant e vignon
Ar c'hi gwennig koant.

Petra 'zo aze?
Skreved o pesketa eoged
Hag herlegoned.



An dluzhenn 'zo kaer
An eog a zo mat da zebriñ
Ar fubu a bik.



Nadozioù-aer sklaer
Ar sourded gant livioù chik
Ar marc'h-koad gant e dad.



Heureuchin farsus
Oc'h ober goap diouzh ur big
Ur skrignadenn lemm.



Kalz a skreved zo
O vosc'hoarzhin war ar geot
Perak e c'hoarzhont?



Petra 'zo amañ?
Dluzhed ha siliennoù
Eoged ha mandoged.

Al Leger 'zo sklaer
Bezhin 'zo war ar rinier
N'eus tamm trouz ebet.



Dourgon al Leger
Razhed-dour ha glazarded
Sourded war ar vein.



E-barzh ar stêr vras
Ez eus leun a zluzhed
O sellet ouzh ar gouelaned.



Ar skreved
A blij takoned dezhe
Yer-dour, herlegoned, driski.

Ar mein a luc'h kalz
El Leger 'vezont kavet
E foñs an dour dous.



Strinkerezh dour glas
E-barzh al Leger kaer
Gant he fiñvadenn.




Dilavar ar stêr!
Dour dous o vont 'barzh ar mor
Perak out didrouz?



Kastell Tonkedeg war ribl al Leger

Perak ez eus bet savet ur c'hastell e Tonkedeg?

- Evit en em zifenn ouzh al laeron a zeue dre ar stêr, al Leger.
- Evit gwareziñ tud ar vro e-pad ar brezelioù a oa niverus er Grennamzer. Pa veze brezel e c'helle ar bobl voutin dont er goudor er c'hastell gant o loened. En eskemm ouzh se e ranke an dud-se skoazellañ tud ar c'hastell : reiñ ul lodenn deus o eost, greun, ed, kerc'h, yer, houldi ha dont da sikour gant o loened evit al labourioù bras.
- Er vro e oa danvez evit sevel ur c'hastell. Leun a zanvez prenn a oa er c'hoadeier. Diskaret e veze gwez evit gellet implij o c'hoad evit ober dorioù, prenestroù, speurennoù hag evel just evit ober tan er siminalioù. An dommerez nemetañ e oa.
- Aes e oa magañ an dud er c'hastell peogwir e oa pesked el Leger : eoged, dluzhed. An dudjentil a c'helle chaseal er c'hoadeier tro-dro evit kaout kig da zebriñ. Gwez avaloù a oa e liorzhoù ar c'hastell ha graet e veze sistr gant an avaloù.



Istor ar c'hastell

Kroget he doa ar familh Koedmen-Pentevr da sevel ar c'hastell e penn-kentañ an daouzekvet kantved. Met an dug Yann IV (1364-1399) en doa goulennet e vefe dismantret abalamour ma oa aet mestr ar c'hastell eus tu Roue Bro-C'hall pa oa Yann IV o vrezeliñ a-enep dezhañ. Rolland IV Koedmen a lakaas da adsevel ar c'hastell e 1406. War-lerc'h en doa cheñchet ar c'hastell perc'henn meur a wezh a-raok dont da vezañ ur plas kreñv evit soudarded an arme e 1577. A-benn ar fin e vo dismantret war-dro 1626 war urzh Richelieu. Kastell Tonkedeg zo unan eus ar re vrasañ e Breizh goude kastelloù Felger ha Naoned. Tud zo bet o vevañ ennañ betek ar bloavezh 1627.



Ur wezh aet e tu diabarzh ar mogerioù-kreñv en em gaver er porzh izel e-lec'h ma oa ar marchosi. Ur foz pe un douflez a oa dirak an dorioù-tal. Ret e oa implijout ur pont-gwint evit gellet mont er c'hastell. Daou bont-gwint a oa : unan evit an dud war droad hag unan all ledanoc'h evit ar c'hezeg. C'hwec'h metrad tevder eo ar mogerioù.



▶ E pep kastell e oa ur chapel evit an oferennoù hag ar pedennoù. E Tonkedeg ne chom nemet an dismantrou diouti.



▶ Roudoù eus ar privezioù a veze implijet gwezhall. Ar c'haoc'h hag ar staot a gouezhe d'an traoñ hep banne dour ebet.

An tour-meur

En tour-meur n'eus ket roudoù ken eus ar solieroù hag a zispartie an estajoù kenetreze. E rez-an-douar e veze an evajoù hag ar boued. En estaj kentañ e oa annez an aotrou. En estaj diwezhañ e oa ar soudarded. Dre ma oant el lodenn uhelañ e c'hellent evezhiañ ar vro.



Taboulin

Embannet gant TES (Ti-Embann ar Skolioù):
30, ru Brizeug – 22015 Sant-Brieg Cedex
Pgz: + 33 (0)2 96 68 14 50 – Plr: + 33 (0)2 96 68 14 52
www2.ac-rennes.fr/tes – e-mail: tes@ac-rennes.fr
Renner an embann: Jean Le Clerc de La Herverie.
Aozourion: Skol Diwan Lannuon. Skol Diwan Gwened (p.4)


Trugarez da : Fañch Peru.
Kenurzhier: Maryvonne Berthou.
Tresadennoù: Malo ar Menn.
Tresadenn an titl: Gentas er Vuhé.
Moulltet gant Guivarc'h, 22190 Plerin.
Disklêriet hervez al lezenn war ar c'hazetenniñ.
Priz: 1€.

ISBN 978-2-35573-052-8 Kod CRDP 220 TE 226
ISSN 1632-9945



EVIT MONT PELLOC'H!

Buhez an eoged



Kurius a-walc'h eo planedenn an eoged. Ganet e ruzelennoù, adstêrioù ar stêr vras, e tiskennont d'ar mor, yaouank c'hoazh, hag eno dre ma 'z eo fonnus ar boued, e kresk o ment hag o fouez.

Neual a reont pell diouzh aodoù Breizh war-zu hanternoz Amerika betek ① **raz Davis**, pell du-hont etre Douaroù ar C'hanada ha re ar Greunland.


Hag un devezh e teu c'hoant dezhe ivez d'o zro da zizoleiñ bedoù nevez hag ez eont a vandennadoù da heul red an dour betek genoù ar stêr.

Hag ur bloavezh pe zaou goude, deuet da vezañ pesked gour, e tistroont, int ivez, d'o bro c'henidik, da stêr o bugaleaj. Mervel a ra kalz anezhe, evel just, e-pad ar veaj hir-se.


Hogen, meur a hini a zegouezh betek hon aberioù ha goude, tamm-ha-tamm, eus an eil lamm-dour d'egile, eus an eil skluz d'eben, e

neuiont etrezek an andon. Ne vez ket gwall aes alies tremen ar skluz daoust ma 'z eus bet graet gant ar besketaerien « skeulioù eoged », pep pazenn anezhe o vezañ e gwirionez ur poullad dour.

Da ziwall o devez ivez rak ar saotradur. Klask dour yac'h en ur wazh nepell eus ar stêr vras, setu aze o fal rak deuet int amañ da nodiñ.



► Kempenn a ra ar femelenn he neizh e grouan ar stêr. Kerkent ha m'he devez taolet he had ennañ e strink he far e laezhenn war an had.




► Eus ar vioù-se e tifluko, un nebeud mizioù goude, munus gant o sac'h-mager dindan o c'hof. Kreskiñ a ra ar re-mañ tamm-ha-tamm. Anvet e vezont neuze glizig.

Ur pesketaer yaouank

Yaouank-tre en doa desket Erwan pesketa. Evel holl gañfarted ar gêriadenn o vevañ nepell eus al Leger en doa kroget gant ur berchenn korz, un tamm neud hag ur spilhenn kemenerez kammet he beg dezhi. Loched a veze tapet gantañ hag un darz bennak gwezh ha gwezh all. Diwezhatoc'h e voe prenet dezhañ ur berchenn wirion e bambouz hag ur moulined bihan. Nag a stad a voe ennañ en deiz-se! Adalek neuze ez eas da besketa siliou ha dreist-holl dluzhed gant buzbug e-pad ar goañv, kelien, lamperezed, skrilhed, c'hwiled (...) e-pad an hañv. Kenteliet e veze gant un amezeg dezhañ, ur pesketaer dispar a sante ar pesked evel ma sant ar c'hazh al logodenn. Tamm-ha-tamm en em lakaas ivez da besketa eoged.

Fañch Peru, *Glizarc'hant*, Skol Vreizh



Ar Yeoded zo war ribl all al Leger. Ur gêriadenn galian-roman eo. Furchadegoù a vez aozet gant arkeologourien.

Chapel ar Yeoded a zo brudet abalamour da delwenn ur Werc'hez gourvezet; e gwirionez e vefe ret lavaret ar Werc'hez « gwilioudet », da lavaret eo : o wilioudin.



E Logivi emañ iliz Sant-Ivi hag a zo bet savet er ^{XVI}^{vet} kantved. Ur feunteun gouestlet da sant Ivi a zo war bord ar stêr.

An hent-alaj

Er bloavezh 1825 e oa bet kroget da sevel an hent-alaj war kae ar Gordenniri. Aesetoc'h oa d'ar bigi mont ha dont war al Leger. Pevar bloavezh e padas al labour. Sachet e veze ar bigi gant kezeg hag a veze o vale war an hent-alaj. Staget e veze ar gazeg ouzh ar vag gant ur gordenn.



Ur stankell evit mirout dour al Leger a oa bet savet e Kermaskilheg war gumun Plounevez-Moedeg er bloavezh 1920. Gant nerzh an dour e veze graet tredan da lakaat labouradeg Vallée da vont en-dro. Paper a veze graet gant pilhoù el labouradeg-mañ hag a oa an hini bouezusañ eus ar vro ; war-dro 200 den a labourere eno. Freuzet eo bet ar stankell er bloavezh 1996. → ^{Tab. 9}




Stankell Kermaskilheg gwezhall

An eoged

Bevañ ara an eoged e hanternoz meurvor Atlantel. Dont a reont da c'hreuniañ en dour dous. Gouennoù eoged all hag a vev er meurvor Habask a varv goude greuniañ. An eoged a zeu da Vreizh ne varvont ket ha gallout a reont zoken ober meur a wezh an dreizhadenn etre norzh ar meurvor ha stêrioù hor bro. Bep bloaz e teu eoged da c'hreuniañ el Leger. Stank-kenañ e oa an eoged e Breizh. Kontet e vez ne blijket d'an devezhourien labourat en ur menaj ma vije roet re alies eoged dezhe da zebriñ.

Lannuon eo an eil kêr eus departamant Aodoù-an-Arvor, war-dro 19700 den o chom enni.

Brudet eo Lannuon evit e stalioù urzhiataerezh hag elektronek : France Telecom, Alcatel. Ar stal enklask CNET (Centre national des télécommunications) zo bet staliet e Lannuon er bloavezh 1960 a-drugarez d'he rener Pierre Marzin a zo bet maer Lannuon e-pad ur frapad.



2 E Belleger ez eus teir zraezhenn, un tour-tan, ur porzh anvet Begenn hag ur gêriadenn. Belleger a dalvez kement hag « aber al Leger ». Gallout a reer mont war droad, dre an hent-alaj war bord ar rinier eus Belleger da Lannuon. Rak stag eo Belleger eus Lannuon. Tour-tan « Beg Leger » zo aet en-dro evit ar wezh kentañ d'ar c'hentañ a viz Genver 1885, savet eo bet er bloavezhioù 1883 ha 1884.


3

En aber al Leger e vez mesket an dour dous hag an dour sall. E-kichen Belleger emañ traoñienn Gwazh-Lagorn. Kalz a laboused a vez gwelet eno rak boued a gavont el lec'h idegolu.



Al Leger oc'h erruout er mor.

An dachenn dour-red evit ar c'haiak a zegas sportourien vrudet, e-giz Sébastien Combet hag en doa bet ur vedalenn aour e kampionad ar bed 2007. Philippe Quémerais ha Yann Le Penneec o doa bet ar ⁵^{vet} plas e c'hoarioù olimpek 2004.



© Coll. Cartopole de Baud (56) - www.cartolis.org



Ur vilin e Benac'h

Milinoù al Leger

Bet zo bet 155 milin war al Leger, an holl o doa anvioù brezhonek : Milin ar C'hleuzioù, Milin Nevez, Milin Kerwern, Milin Dinan, Milin Keranre, Milin al Loser, Milin Kergrist, Milin Traou Morvan, Milin Kergerfiou, Milin Tonkedeg, Milin Bulien, Milin Keriel. Bez' e oa tri seurt milinoù :

Ar miinoù evit ar bleud : malet e veze an ed, gwinizh ar peurliesañ, evit kaout bleud.

Ar miinoù paper : graet e veze paper gant kozh tammoù danvez, ar pilhoù a veze dastumet gant pilhaouerien.

Ar miinoù lin : labouret e veze al lin evit tennañ an neud eus korzenn ar blantenn. Gant an neud e veze graet danvez pe lien solut-tre evit ober dilhad, liñselioù, gouelioù evit ar bagoù.

→ ^{Tab. 9}



Izel eo tour-tan « Beg Leger ». Met pintet eo war an uhel.

Ur stêr pesked

Unan eus ar stêrioù gwellañ evit an eoged eo al Leger. Pesketaet e vez an eoged adalek miz Meurzh betek fin miz Gouere. Kavet e vez ivez pesked all el Leger : dluzhed hag a vez pesketaet etre miz Meurzh ha fin miz Here. Kavet e vez ivez penndoged hag a zeuio da vezañ raniged.



Elenenn al Leger o Saout feurm Penn Leger o peuriñ er parkeier e-kichen ar strinkañ en ur park e Penn milinoù-avel. Leger Vras e Boulvriag.

Al labour-douar

War ar maezioù tro-dro d'al Leger ez eus war-dro 680 atant. Savet e vez saout-laezh dreist-holl evit gwerzhañ o laezh, met savet e vez ivez saout-kig. Gounezet e vez ed ha maiz e-barzh ar parkeier. Foenneier a zo a-hed ar stêr, eno e vez troc'het ar foenn a servijo da voueta ar chatal e-pad ar goañv.

Saotradur an dour

Dour ar stêr a zo ur melezour eus yec'hed an douareier tro-dro. Ma varv ar pesked pe ma 'z eus nebeut a besked en ur stêr ez eo peogwir eo fall stad an dour. Meur a saotradur a zo : ar produioù kimiek, al louzaouiñ, an temz.

Orin ar saotradur a c'hell dont eus dour lous an tiez na vezont ket liammet gant ur stal-burañ.



Ar saotradur a c'hell dont ivez eus liorzhoù an dud pe eus al liorzhoù-kêr pa vezont louzaouet re evit lazhañ al loustoni. Broudet e vez an dud da implijout nebeutoc'h a louzeier kimiek en ur c'hwennat pe en ur asantiñ kaout muioc'h a c'hlasvez war bord an hentoù pe war ar riblennoù.



Ar saotradur a c'hell dont ivez eus al labour-douar. Ma vez lakaet re a ludu, pe re a demz, hañvouez moc'h da skwer, ez a lod eus al ludu e-barzh ar stêrioù. Setu perak ez eus re a nitrat e stêrioù Breizh. Hervez reolennoù Europa e rank kementad nitrat ar stêrioù bezañ dindan 50 mg dre litrad. E lod eus stêrioù Breizh ez eus muioc'h eget 50 mg dre litrad.

El Leger emañ ar c'hementad a nitrat o tiskenn goustadik : etre 20 ha 35 mg/l emañ bremañ. Ma vez re a nitrat er stêrioù e vo bezhin glas war an aodoù. Kaer

a vez dastum ar bezhin glas e talc'h bernioù all da zont, abalamour d'an nitratoù a gaver stank e-barzh gwazhioù hag en em led war an draezhenn.

Dilennidi Lannuon-Treger o deus divizet cheñch penn d'ar vazh. Kinniget o deus e vefe nebeutoc'h a vezhin glas en ur zigreskiñ an nitrat a gaver e dour ar stêrioù. Ret e vefe kaout 10 mg dre litrad er bloavezhioù 2027. Penaos? En ur vroudañ al labourerien-douar da lakaat muioc'h a beuriñ en o farkeier ha nebeutoc'h a vaiz hag a ed. Lonket e vez an nitrat gant ar peuriñ, kement-se nebeutoc'h o vont e dour ar stêrioù hag a ya betek ar mor. Ouzhpenn-se, ar saout bouetet gant ar peuriñ a ro laezh gwelloc'h hag a c'hello bezañ gwerzhet keroc'h.



Kan al Leger

Sioul e tirollez, Leger,
Da ruban voulouz du.
E kreiz 'tre ar pradeier
Gwez pupli e bep tu.
Hiboudiñ 'ra da zourioù,
O ruilhal dreist ar skluzioù.
Hag a-bell,
Te 'luskell
Din va hunvreoù...

Gwezhall, bugale seder,
A vilin da vilin,
Ni 'leunie da bradeier,
Gant hon c'hoarzhoù lirzhin.
Azezet war da ribloù,
Ni 'gonte hor c'hevrinoù
' 'Us d'ar Froud
O hiboud'
Ni 'rae hunvreoù...

Pegen koant da vilinoù
'Hed an draonienn kent stank.
Na kanañ 'rae da skluzioù,
Gwezhall p'edon yaouank.
Hag a-grap an tosennoù :
Chapelioù ha manerioù.
Kant kastell.
Kant tourell.
Koant 'vel hunvreoù...

Pa rin va hun diwezhañ
Dindan an ivinenn
Pa vo 'n avel o c'hwezhañ
'Soñjin c'hoazh en draonienn
Me 'glevo boud da zourioù.
Me 'glevo kroz da skluzioù.
Du-hont pell
O luskell'
Din va hunvreoù.

Anjela Duval, Here 1963